

# Chanson Nevez Potret an Arc'hant

## *Var eun ton charmant*

Pa em beus cavet matier e teuan da implija  
An nebeut speret a meus evit gallout rima  
Eur ganaouenic nevez bar boes an dud yaouank  
A vlan e n'em henti bars en emzer bresent

Etre an oll e cavan daou e particulier  
Eb digeri va ginou da lavaret gavier,  
En nem gar en onesti a gant fidelite  
Ag a vo sur unisset met o zud he c'hersfe.

Mes ! en amser-man vel mer gouzer erfad.  
Ne astimea muy an dut mar n'o defe yab'had  
Euryalch'ad quiet a va drec'h eur reng a bemp scoet;  
Mar o peus tout an draze c'houi o po do souet. ,

Bet zens bet eun amzer, mes brema ne ma muy  
Ar re gos ho deus guelel hag o deus dontet din  
Ne glaquent met tud renquet dre o d'hempportamant  
A brenian na seller muy nemet deus en arc'hent

Pe c'houi vo den a feçon pe c'houi ne voet quiet,  
No ba netra da sonjal, maro peus dec mil scoet.  
Goulenit ag o pezo an hini o po c'hoant.  
Na neus buet a zargoutou vit potret an arc'hant.

Me am beus bet remerquet, a goelet ran atao  
Pa ves quiston d'ober demiziou eu em bro.  
E zeo potret an arc'hant eo a c'honez bepret,  
Lec'h a re all ne gavont met eur treuch col da lipat.

Estonnet on gouscoude o tonnet da gompren  
E zeus quemenn a atach evit ar madou monden,  
Hac guelel a ren bemdez tud o vone d'ar bed:  
Na ya met eur gos lincer ac eun archet gante.

En despet da guement-se, e vo cavet bepret  
Cals an dadou a mamou, ag eb scrupul ebet,  
A c'hamperc'h a bugale da gemeret o c'hoant,  
Evit quemer eur barti eneb o santimant.

Me a meus gret va unan, dre va experienc.  
N'a neuz quiet c'hoas pel amzer ma poursuen va chanz  
An avaristed alies laca ampechamant,  
Ag ar separation entre an dud yaouank.

Me moa choaset da vestress eur plach honest meurbel,  
Pehini a garen sur ya, dreit an oll verc'het,  
Ag e c'hallan lavaret, a memeus assuri,  
E voa ker fidel din evel ma voant dezi.

Bet ezom eur pennad mad, ouz n'em zarempredi,  
Epad eur blavez pe zaou, martreze memeus tri,  
Ag or doa credet parfet e vijemp unisset,  
Mes e creis hon esperanc, e zom bet separet.

Epåd hou entretien, e parlamtem bepred,  
Eus an opposition a alfemp da gaved,  
Demeus a bers hor c'herent, abalamour d'hon da ivez,  
Rag allas ar yalc'had scanvan a oa eus va c'hostez.

Ag ar pezh boa soujet a so bed aarnet,  
A den eur penad goude e zeo bet prononcet,  
An arret a zisporti entrezomp-ni hou daon,  
Colet nor deus hou amzer ag uzet hor boutou.

Pa oamp ni e nemp gavet en eun tu a goste,  
Eur vech e particulier, hi lavaras din me,  
An daouelou n'he daou-lagad, he mouez anter troc'hét  
Allas e mef, va mignon, nimp a va separet.

Eun den so deut d'am goulem ag en deus fors arc'hant  
Me a ranko en quèmer a n'am be c'hoant,  
Me zo c'hoas merc'h minorez ne meus met naontec-va  
Non quet mestres ma hunan, ret eo obeissa.

Mes c'hui tadouha mamou perac e exercet,  
E qever ho bugale eur pouar difennet,  
Ne n'och quet quen ignorant quement na ouiefec'h que  
Ar pezh a rer evelse zo eur c'has reservet.

Rag ar Broidane divin o deveus destinet  
He chanc da bep cronadur, pa zeo deut var ar bed  
Ha c'hui tad mam dinatur c'hui o c'heus ta sonjet  
E commandet d'an hini e deveus o crouet.

Ho bugale zo dezhan muyoc'h eguet deoc'hu,  
A pa resistit outhan alies e erru.

E velit ho bugale en eur vrasa mizer,  
Daoust dar berniou arc'hant a deus en ho syer.

Guelet reomp exemplou dirag on daoulagad,  
Bugale rei ho maos d'ho mam couls a d'ho zad  
Dre m'a deus o c'hontregnet, ep sou da gaout pec'h  
Da rei ho dorn d'ar re ne oa quet d'he gleet.

Clevit comzou eun den fur o parlant evel-se,  
Eun dimezi mad a gred dre volonte Doue,  
Zo eur Barados terrent; mes an hini ve gret,  
Dre an arc'hant zo alies cun ifern anticipet.

Perac c'hoas, tad dinatur e c'hui mam obstinet,  
E forcit ho bugale da zon da guemeret,  
Tud ag a rei ho malheur er bed tre ma vont-hi,  
Ag a vezio sious caos dez'ko d'en em zaoni.

C'kui vir eus ho bugale da guemeret o c'hoant,  
Evit dont d'ho dimezi me lavar d'an arc'hant,  
O dorn o deveus roet met a c'halon deus quet,  
A birviqueu plijadur n'o do anuy var ar bed.

Neo quet vidon va unan e larant quement-una,  
Rac me zo etablisset eun tamic zo dija,  
Ag ar plac'am beus hentel so ive demezet,  
Gras dei da veva Eurhus atao gant e fried.

Me garfe retorn brema var amzer bassaeet,  
Vit n'em zisposi gueloc'h en ini da zonet,  
Mes allas! va mignonet nac en eil nac eguille,  
An hini a ve et cos ne all yaouank ken.

Mes c'hui o l potret yaouank, pa noc'h deuzet c'hoas,  
 Eun avis a roun deoc'h : pa zeot d'ober o choas,  
 Sellit atao en o reuk, a non pas huelloc'h  
 Gant hon da dapout lamou ac' ve noazus deoc'h.  
 Ha c'hui tudigou yaouank, pa o peuz an amzer.  
 Considerit eun neabet, a c'hui a velo sclert  
 Pebeus chanchamant o zen goule an dimei ;  
 An tourmant ac ar glac'har, an ivrout an annui.  
 Mar em beus c'hoas eun avis da rei deoc'h mignoguet,  
 Eo ma teulet da zioual dre ma moc'h c'hoas, haret,  
 Na ve ho calon charmet ar faux amitie.  
 A mar guelllet, var c'hentel c'hui vo furoc'h a ze.  
 Rac ar merc'het yaouank- se a so trompus meurbet,  
 Na ziscouezont met eun tu, an tuall vo cuzet.  
 Me lavar ; eur plac'h yaouank so evel eur rosen,  
 Pehini en dimezi a chanch en eur spermen.  
 Finissa ran va chanson gant eur galon laouen.  
 En eur bedi tad a mam da zonet da gompren,  
 E zeo guelloc'h union entre an daou fried,  
 Evit neo disunion gant oll vadou ar bed !

## CHANSON DAOU DEN YAOUANK

—\*—  
*Var eun ton Nevez*



Mar gallan gout ar feçon e ranquan composi,  
 Eur chanson had eur c'henviat herve va fantaisi,  
 Var sujet daou den yaouank, tud la condition.  
 Estimet en ho farres gant an dud a fesson,  
 Ne oan nemet unec vloas pa int bet commencet.  
 Ha dre oll en em guaven en hent gant ha loenet,  
 An hini a ve goassa eguille a secoure  
 Ber e guaven an amzer ho tremen ho bue.  
 Pa oan daouzec vloas echu, in eat er c'hatechis.  
 Hag en em heuillen dare evel ma oa no guis.  
 Betec ober ho zri fasq e mesk ar vugale.  
 Bep bla e cresh ar mail e chaden ho amitie.  
 Er bla var eeh ma int eet er mes eus ar c'hatechis.  
 E hin commencet ho daout da roula ho yaouankis.  
 He c'fioudui a rei d'ar guer deus a bep a ssemble,  
 Evel daou den unisset en ilis gant Doue.  
 Ho zud ho velet ar merq deus o fidelite.  
 A sonjas separi an eil beus eguille.  
 Ar plac'h a ya d'ar gouen peder le odiouanton,  
 Evit ma c'hanconaje bea fidel dean,  
 Pa int bet disparatiz an eil deus eguille.  
 Ne souje que gant bo zud ho devoa finisset.  
 Ar goas a oui scriva ac a gas lizeou.  
 Eur veach ar sizun reesus do glevet he c'helou.  
 Pa echuas an amzer et teu ar plac'h er mes.  
 N'ho devoa quet ar bouer d'he ober lesnes.  
 Hac en em c'heuillen darre, evel an eur guenta,  
 Eur garante ne oa quet evit e distruja.

Betec eur bla varn-ugent in bet em c'heuillet,  
Quen a erruas an urs da denna ar billet,  
Neuze ho deus renoncet dar plijadurezo  
O daout bet assemblies dre en assembleo.

Pa antre an den yaouank er gramp evit tenna  
E santas e oll vemprou e gommanç da greua  
Hac e sonjas e tenje eun numéros izel  
Hac e rançle separi eus e vestres fidel.

Hasten a re e zorn pa erruas e renç  
Hac e tigoeas gantan an numero ugent !  
Cetu mantret e galon ha beuzet en glac'har,  
Quen a garje e vije et divar an douar.

Pa oa annoncet dezi gant'he gamarado.  
Peno en devoa tennot, ha pe seurt numérol,  
E lavaras a voes huel : aroc ma partije  
El voelje e lianan a laca en e be.

Ar zul arog ma partije o deus quimiaded.  
O tont deuz a gousperou int en em rencontret.  
Ha daelau ho daoulagat a glabie ho dillat  
E coste ar c'leus pa oan o c hober o c'himiad.

Abaoue hon bugaleach ma mestrezic fidel.  
E soejamp e oam c'hoas gant Doue eternal  
Evit bea unisset an eil gant eguile,  
Queit a ma vijemp læset er bed man en bue.

Hon daou e voamp no veva er memes antimant  
Hac ma speret emzi e voa paraillamant  
Me songe diu na vijempe birviquen separet,  
Quen a bliche gant Doue ont c'has divar ar bed.

Abalamour ca Doue, da rankan partial,  
Evit merç a garantez ouzoc'h a c'houlenn an  
Ar mouchouar so ugnec'h o sec'ha o taelou,  
Mo ellint sellet outan, bete fii ma deiou,

Dimeus a greis va c'halon emei va mignon quer.  
E c'hastennant d'ec'h va dorn da rei ar mouchouar.  
Lequet-en en ho codel a dalc'hit mad dean'  
Mar o pes soulajamant o tont de visitan.

Tachit dens gonsoli e queit a ma veet :  
Né vo quet hir o conge deus a liou a zougue.  
Car ben pemzec de aman ac an de a hirio.  
E ves pep hini ac'hanomp o repos en e ve.

Credi a ran fermamant ar pes a lavarit,  
Rag evel mar c'herruin e guer à Saint-Briec.  
E c'houlennin eur billet da vont d'an hospital.  
Ac'hane vint transportet a laquet en daour.

Dindant ar pevar devez ma be et partiet  
Eo marved ar pl'ach yaouank er guer ac interred,  
Daou devez just goude e c'herru ar c'helou  
E oa maro e mignon, Doue d'ho fard-suno.

Queit a ma vev an eil den en glac'har d'eguile,  
Ne quet echu ar respect hac ar fidelite,  
Goulennoup oll a gallou ma voipt recevet.  
Gant Jesus hac ar verc'hes ebars an evurusted